

taBoutin

Kelaouenn ar skolioù

Emañ ar gomz gant ar skolidi

Miz Ebrel 2009 • Niv. 15

An aberioù



Petra eo un aber ?

Traoñienn hir ur stêr eo, e-lec'h ma teu ar mor div wezh bemdez. Tri aber a zo e Penn-ar-Bed : an Aber Ac'h, an Aber Benniged hag an Aber Ildud. Etre Plougerne ha Lanniliz-Landeda emañ an Aber Ac'h. Etre Lanniliz-Landeda ha Treglonoù-Plougin-Sant-Pabu emañ an Aber Benniged. 12 km a hirder eo an Aber Benniged hep kontañ ar stêr anvet er memes mod. Etre Lannildud ha Lambaol-Blouarzhel emañ an Aber Ildud.




Ul lec'h kaer eo an aber, gant lec'hid, pesked, bezhin ha plantennoù. Laboused brav a vez gwelet ivez war an aber. Ur pont pe meur a bont a zo dreistañ.

Ar prad sall


Ar prad sall a zo ur metr izeloc'h eget live uhelañ ar mor. Ul lodenn eus an aber eo, e-lec'h ma teu ar mor pa vez reverzhi. Traezh ha lec'hid a ya d'ober anezhañ. Loened ha plantennoù a bep seurt a vez kavet war ar prad sall. Kranked a vev en aberioù. Debrñ a reont pesked ha

garved. Kavet e vezont dindan ar mein, dindan ar bezhin, pe dindan al lec'hid. Ar garved a zo un doare buzbug hag a vev e lec'hid an aberioù. Debrñ a reont traezh. Implijet e vezont gant ar besketaerien evit boueta o linennoù.

Bezhin a vez kavet er prad sall ivez. Tennañ a reont o boued diwar dour ar mor. Gant ar c'hrapon e chom stag ar bezhin ouzh ar reier. N'eo ket e-giz ur blantenn hag a denn he boued diwar an douar dre he gwizioù.



▶ Ar stleuñv-dour



▶ An obion

Plantennoù ar prad sall a zo ispisial rak gouzañv a reont an holen gwelloc'h eget ar plantennoù all, dreist-holl ar re a zo an tostañ da draoñ ar prad sall.

Pont Treglonoù

Gwezhall-gozh ne oa nemet daou zoare da dremen eus un tu d'an aber d'egile : mont war droad a-sec'h, d'ar mor izel, dre ar roudouz pe treuziñ gant ur vag d'ar mor uhel. Er bloavezh 1851 e oa bet savet ur pont koad, 50 metr a hirder dezhañ. Betek 1893 e veze ret paeañ evit treuziñ. Gant ar c'hirri-tan hag ar c'hirri-samm o tont da vezañ stankoc'h-stankañ e voe ret ober ur pont nevez ha solutoc'h. War c'houlenn

kumunioù Lanniliz ha Treglonoù e voe lakaet sevel ur pont. Digoret e voe war an ton bras d'ar 25 a viz Eost 1935.



Hiziv an deiz, estreget gant ar c'hirri e vez darempredet ar pont gant pesketaerien ha pourmenerien. Diwarnañ e vez gwelet bourkig sioul Treglonoù, kludet war ribl kreisteiz an Aber Benniget.

[Diwar testenn-displegañ panell pont Treglonoù.](#)

Ar mareoù



Al Loar hag an Heol a sach war dour ar morioù, setu perak ez eus mareoù.

Ar mor a c'hell bezañ izel pe uhel. Diskenn pe sevel a ra ar mor bep 6 eurvezh. Ret eo gouzout e vez izel ar mor 2 wezh bemdez hag uhel 2 wezh bemdez ivez. Un devezh a zo 24 eurvezh ennañ.



Marvor a vez pa vez al Loar en nec'h hag an Heol war ar c'hostez. A-skwer eo an Heol hag al Loar gant an Douar. N'eus ket un diforc'h bras etre ar mor uhel hag ar mor izel : bihan eo an ampled pe an digor-mor neuze.

Reverzhi vras a vez pa vez al Loar hag an Heol war ar memes linenn. Uhel-kenañ e vez ar mor. Sevel a ra betek an tevenn. An ampled pe an digor-mor a zo bras. Reverzhi vras a vez div wezh ar bloaz, e fin miz Gwengolo hag e fin miz Meurzh.



► Brignogan, d'an 20 a viz Gwengolo 2008 war-dro 9 eur diouzh ar mintin.



► Brignogan, memes devezh war-dro 3 eur goude kreisteiz.



An aod a cheñch doare hervez ar mareoù. Dizolo e vez lod eus ar reier pa vez izel ar mor.

Ar bigi a zo war ar sec'h. An draezhenn zo ledanoc'h.

Reverzhi

Reverzhi vras
 'Vo benn warc'hoazh.
 Ni 'z aio d'an aod
 Da glask pizaod.

Tre a zo!
 Poent eo.
 Emañ an darze*
 Nag a frete!


Troet al lanv
 Deomp en-dro!
 Prest 'vo gourlen
 Harp ar mor en tevenn.

Ha ni war ar vri
 A zebro hor merenn
 E-kreiz ar peuriñ
 Brennig ur guchenn.

G. Kervella

* daere


▶ An tre eo pa vez ar mor o tiskenn.




▶ An daere eo ar poent m'emañ ar mor en e izelañ.



▶ Al lanv eo pa vez ar mor o sevel.



▶ Ar gourlen eo ar poent m'emañ ar mor en e uhelañ.



Gerioù-mesket

i	e	w	a	n	a	d	i	v	a	e	a	o	r	e	o	ù	b	t
z	z	o	p	a	ñ	s	ê	i	d	r	o	d	e	t	e	o	u	l
h	ù	v	e	r	i	k	r	a	n	k	e	d	n	n	u	i	b	i
e	b	u	s	v	r	e	n	n	l	s	d	o	u	a	r	r	u	z
l	ê	e	k	r	b	c	h	u	u	e	p	a	o	l	e	o	r	h
v	z	h	e	o	e	a	l	o	a	r	n	n	b	e	v	v	y	ê
o	h	e	t	m	d	n	b	r	e	n	n	i	g	u	e	u	j	r
r	ñ	n	a	a	s	a	p	e	s	k	e	d	e	o	r	e	p	o
b	i	n	e	p	l	o	c	h	r	ñ	n	e	r	g	z	m	g	ù
r	n	o	r	l	l	e	c	'	h	i	d	c	c	l	h	e	o	l
a	h	v	i	r	v	d	l	c	h	i	o	c	'	h	i	v	u	a
n	s	w	e	o	d	i	ñ	z	o	z	d	ù	d	h	ñ	v	r	d
k	o	t	n	h	e	u	e	h	d	i	v	a	s	k	e	l	l	n
e	z	v	ê	'	k	b	u	o	e	s	u	z	h	u	w	w	e	i
d	o	u	n	r	s	e	o	ù	v	o	r	r	v	r	ê	n	n	s
ù	o	b	e	r	i	e	n	l	h	e	o	n	n	i	g	o	n	i

aberiou

reverzhi

stêr

laboused

bezhin

kranked

pesketaerien

loar

douar

heol

meurvioù

gourlen

pont

gouelan

morvran

houad

brennig

pesked

lec'hid

divaskell

Taboulin

Embannet gant TES (Ti-Embann ar Skolioù):

30, ru Brizeug - 22015 Sant-Brieg Cedex

Pgz: + 33 (0)2 96 68 14 50 - Plr: + 33 (0)2 96 68 14 52

www2.ac-rennes.fr/tes - e-mail: tes@ac-rennes.fr

Renner embann: Jean Le Clerc de La Herverie.

Aozourion: Skol ar Galon Sakr Lanniliz.

Dielloù: Kreizenn an Oaled, Treglonoù.

Kenurzhierz: Maryvonne Berthou.

Tresadennoù: Malo ar Menn.

Tresadenn an titl: Gentas er Vuhé.

Moulet gant Guivarc'h, 22190 Plerin.

Disklêriet hervez al lezenn war ar c'hazetenniñ.

Priz: 1€

ISBN 978-2-35573-022-1 Kod CRDP 220 TE 198
 ISSN 1632-9945




**EVIT MONT
PELLOC'H!**



An houad roueel

Gwer-teñval eo ma fenn.
Gwenn ha gwer eo ma lost.
Ur roudenn c'hell a zo war ma c'horf.
Ruz-flamm eo ma figos.
Bizied roeñvek am eus.



Ar vorvran vras

Al labous-mañ a vev war ar c'herreg.
Evit pesketa e c'hell mont betek
30 metr dindan an dour.
Gwelet e vez alies o lakaat
e zivaskell da sec'hañ.





An herlegon

Bez' em eus ur pigos du.
Gwenn eo ma fenn.
Gris-sklaer eo ma c'hof.
Gwenn eo ma divaskell.
Gwenn eo ma lost.
Du eo ma favioù.
Melen eo ma bizied.



Ar c'hefeleg-aod

Gell eo ma fenn.
Gell eo ma divaskell.
Du hag orañvez eo ma figos.
Eeun ha gris eo ma favioù.
Gell eo ma gouzoug.
Gell eo ma lost.




Ar gouelan gris

Melen gant ur pik ruz eo ma figos.
Gwenn eo ma fenn.
Gwenn eo ma gouzoug.
Gris eo ma divaskell.
Roz eo ma favioù, tri biz plat dezho.

Al lanv

Sachañ a ra al Loar dour ar meurvorioù a zo an tostañ dezhi. En e uhelañ emañ ar mor, ar gourlen eo. Treiñ a ra an Douar warnañ e-unan ha treiñ a ra al Loar tro-dro d'an Douar. Setu perak e cheñch bemdez eurioù al lanv.



Da hanternoz ez eo izel ar mor a-live gant an tour-tan.



6 eurvezh 12 munutenn diwezhatoc'h en deus graet an Douar ur c'hard-tro. Uhel eo ar mor bremañ tro-dro d'an tour-tan.



Da 12 eur 24 en deus graet c'hoazh an Douar ur c'hard-tro all. Izel eo ar mor tro-dro d'an tour-tan.



Da 18 eur 36 en deus graet an Douar ur c'hard-tro all. Uhel eo ar mor tro-dro d'an tour-tan.

Al lanv du

Lanv du a vez pa vez saotret ar mor gant petrol o tont eus al listri bras hag a zoug an danvez-se.



© Alphonse Arzel

Ar vatimant Amoco Cadiz a oa aet d'ar strad e miz Meurzh 1978 e-tal Porsal. Hag an 230 000 tonennad a betrol a oa enni a oa bet skuilhet war aodoù Breizh. Bro an Aberioù a oa bet gwall louzet gant al lanv du. Al laboused aod a varve, ne c'hellent ket ken nijal rak paket e oant en danvez pegus-se. Ar reier, ar c'herreg hag an traezh a oa du-pod. Pesked ha kregin a oa bet distrujet. Reolennoù strishoc'h a zo bet savet abaoe evit al listri a zoug petrol. N'o devez ket aotre da dremen ken tost d'an aodoù ken. Ret eo dezho mont gant un hent en tu-hont da Enez Eusa. Met e miz Kerzu 1999, en doa graet peñse ul lestr all, an Erika, e Penmarc'h (Bro-Vigouden). Skuilhet e oa bet 200 000 tonennad a betrol war aodoù Breizh adarre.



© Alphonse Arzel

Titouroù all war CD Rom Diskanoù (*A pa sav an avel*)



Ur pont kozh-Noe eo Pont Krac'h, savet war an Aber Ac'h, peziadoù mein plat war e c'horre. Bemdez e vez goloet gant ar mor. Pont an Diaoul a vez graet outañ ivez. Hervez ur vojenn gozh e oa bet savet ar

pont gant Paolig an Diaoul evit ur miliner hag a gawe re hir an hent evit mont en tu all d'ar stêr. Marc'had a oa bet graet ganto : ar c'hrouadur kentañ a dreuzje ar pont a yaje gant an Diaoul. Paket Paolig Kornok gant ar miliner fin : e gagh eo a lakaas da dremen en e raok.



Ar pont Krac'h pa vez izel ar mor.



Ar pont Krac'h pa vez ar mor o sevel.

BREST

Miz C'hwevrer

Bloavezh : 2009

Prédiction pour Brest et reproduit avec l'autorisation n°54/2009 du service hydrographique et océanographique de la marine - www.shom.fr. Le SHOM n'a pas vérifié les informations contenues dans ce document et ne peut être tenu pour responsable de la fidélité de leur reproduction ou de toute modification ultérieure.

Deiziad	Mor uhel				Mor izel	
	Mintin		Noz		Mintin	Noz
	eur	ampled	eur	ampled	eur	eur
1 S	8 27	72	20 45	68	2 30	14 51
2 ☾	9 10	63	21 34	58	3 12	15 37
3 M	10 05	53	22 38	48	4 03	16 33
4 M	11 19	45	23 59	43	5 08	17 46
5 Y	-- --	--	12 50	45	6 31	19 12
6 G	1 29	49	14 19	56	8 01	20 33
7 S	2 47	63	15 25	72	9 15	21 38
8 S	3 48	80	16 18	88	10 13	22 32
9 ○	4 39	94	17 06	100	11 03	23 20
10 M	5 26	104	17 49	107	11 49	-- --
11 M	6 09	108	18 30	108	0 05	12 32
12 Y	6 48	106	19 07	102	0 47	13 12
13 G	7 25	98	19 43	92	1 27	13 50
14 S	8 00	85	20 17	78	2 05	14 26
15 S	8 34	70	20 54	62	2 42	15 03
16 ☾	9 11	54	21 38	46	3 22	15 45
17 M	9 59	39	22 41	32	4 09	16 38
18 M	11 15	27	-- --	--	5 12	17 56
19 Y	0 13	26	13 07	27	6 41	19 34
20 G	1 48	31	14 33	37	8 14	20 45
21 S	2 50	43	15 20	49	9 13	21 31
22 S	3 34	56	15 57	62	9 54	22 10
23 L	4 11	68	16 30	74	10 30	22 44
24 M	4 45	79	17 02	83	11 04	23 18
25 ●	5 18	87	17 33	90	11 36	23 50
26 Y	5 50	93	18 03	94	-- --	12 08
27 G	6 21	95	18 34	95	0 23	12 40
28 S	6 53	93	19 06	91	0 56	13 13

- ☾ ☾ Marvor a zo pa vez al Loar war ar c'hresk pe war an diskar.
- ● Revezhi a zo pa vez loargann pe loar nevez.

Eurioù al lanv

Eurioù al lanv n'int ket heñvel e pep porzh. E mor Breizh ez eus ouzhpenn 7 eurvezh a ziforc'h etre Brest ha Boulogne e norzh ar Frañs.

- Etre gourlen 4 eur 39 ha tre 11 eur 03 ez eus un tammig ouzhpenn eget 6 eurvezh.
- Un niver bras etre 70 ha 120 a ziskouez e vo kalz a dre, da lavaret eo e tiskenno pell hag e savo uhel ar mor. Bras eo an diforc'h etre an daere hag ar gourlen. Kreñv e vo ar chal hag an dichal.
- Etre daere un deiz ha daere an deiz war-lerc'h ez eus war-dro 48 munutenn.
- An niver-mañ a lavar pegen bras e vo al lanv. Un niver bihan etre 20 ha 60 a ziskouez ne vo ket kalz a dre, da lavarout eo ne ziskenno ket kalz ha ne savo ket kalz ar mor. Bihan eo ar chal hag an dichal. Izel eo an diforc'h etre an daere hag ar gourlen.
- N'eus eur ebet, rak en tu all da greisteiz emamp. Ret eo sellet ouzh eurioù an noz, da lavaret 12:08 amañ.

Gouelini :



Ar gouelan penn-du

(mouette rieuse)

Ment : etre 35 ha 36 cm

Teñval e benn en hañv.

Ruz e bigos, du ar beg anezhañ.

Pavioù roeñvek ruz.

Debriñ a ra amprevaned ha buzbug, pesked, loened marv ha lastez.

Ar gerc'heiz louet (héron cendré)



Ment : 90 cm

Melen e veg.

Gris e zivaskell.

Debriñ a ra pesked, sili ha labousedigoù.



Ar gwilhoù kozh

(goéland marin)

Ment : 74 cm

Du e gein hag e zivaskell.

Ur pigos tev ha melen, ur pik ruz warnañ.

Gwenn-kann e benn.

Roz-sklaer e bavioù.

Debriñ a ra eskern, re vihan ha vioù al laboused all.

Ar c'hefeleg-aod

(courlis cendré)

Ment : etre 53 ha 58 cm

Ur pigos hir ha kromm dezhañ.

Debriñ a ra amprevaned, kregin ha c'hwibu.



Ar gouelan louet (rouez eo)

(goéland cendré)

Ment : 40 cm

Sklaer e zivaskell hag e gein.

Ur pigos gwer-melen.

Pavioù gwer-melen roeñvek.

Debriñ a ra pesked, kregin-mor, kranked ha loenigoù marv.



Ar gouelan gris

(goéland argenté)

Ment : 55 cm

Sklaer e zivaskell hag e gein.

Ur pigos melen gant ur pik ruz.

Pavioù roz-sklaer roeñvek.

Debriñ a ra kranked, boued-kregin, eskern, vioù ha re vihan al laboused all.



Ar gouelan kein du

(goéland brun)

Ment : 53 cm

Liv louet-teñval e gein.

Melen eo e bigos.

Melen eo e bavioù.

Debriñ a ra korfoù marv, preñved-mor. Lazhañ a ra laboused pe loened bihanoc'h egetañ.

Ar gannerez louet

(bergeronnette)

Ment : 18 cm

Du he gouzoug.

Gwer-melen ar pluñv-dindan.

Debriñ a ra amprevaned ha biskoul.



Ar skravig

(sterne)

Ment : 24 cm

Melen e bigos, du ar beg anezhañ.

Melen e bavioù.

Debriñ a ra pesked bihan hag amprevaned.



Ar morbig

(huitrier-pie)

Ment : 43 cm

Du e gein hag ul lodenn eus e zivaskell.

Ruz e bigos.

Roz e bavioù.

Debriñ a ra kregin, kranked bihan, pesked bihan ha loenedigoù en traezh.

